

BURZUDOU VISANT

Graet an oa Visant eur burzud
Hag an oa bamet kalz a dud :
Bet eur blei gant eun tól bonned,
Hag hen ar muian estonnet.

Hanvet kuzulier jeneral,
En euz c'hoantaet eun enor all :
Sethu krog ar pistig ennan
Da vont da Zepute breman !

Graet eur zao lorc'huz d'e vragou,
En euz dispaket dre gargou
Dirak ar bobl, dirak ar bed,
Labouriou talvouduz meurbed.

Poaniet 'n euz kement ha kement
An den c'houec'h vloaz ha daou-ugent,
Ken e sebezzer o klêvet
E oa bihan pa oa gânnet.

Bet eo zoudard ha kaporal ;
Bet vijè zoken jeneral
Mar vijè renet en arme
Ar c'hiz da gommans dre 'r penn-ze.

Vel kent, e vurzud ar granna
Oe lakât ar ru da wenna :
Seth' aze eur marc'hadour gwin
Hag a oar labourat en gin !

Dre fors sklaerat liou e chupen,
Dre fors toll sukr en e zouben,
'N euz roët stum eun tammik zant
D'ar radikal oa bet Visant.

Oc'h ober chiboud da Bameul,
Visant an euz jachet d'e heul
Eur strollad chas dimeuz ar c'hlik.
A glask rei lamm d'ar Republik.

Ha sethu krog eun harzadek,
Eun harlu war lerc'h ar C'hloarek,
Zavet kement a jolori,
Turiet gantè kement a bri.

Ma veffent barrek da sponta
Neb a glew vit ar wech kenta
O iudal hag o c'hlaourenni
Banden chas klanv ar gasoni.

Maes ar C'hloarek, zonn en e za,
A lez an aered da ruza :
Prestik, dindan zeul e voutou,
Vo friket binim ha broudou.

N'euz fors pegement a c'hlaouren
A zavo diwar blas Traoulen,
Nag a vè barrikenado,
Ar paour-kêz Visant a blado.

Vit-han da stlapa krench ha pri,
Hadkwea refont war e fri ;
Trei tu d'e borpant hall ober,
Eun all 'n evo da chom er gêr.

ERWANIK.

(Bonny, adj. maire, Ploujean)